

brammañ

PRIZ : 15 LUR

100%
FUCK AN EMSAV !

BREIZH , HOR BRO DEOMP-NI

Talibaned Breizh

Roazhon - Arvarusoc'h eo bremañ an traoù e Breizh, goude emsavadeg ar strollad a vez lesanvet « Talibaned Breizh », da lavaout eo « Studierien ar Yezh ». Ar strollad a zo mestr war darn vrasañ hor bro hiviziken. En o fenn emañ an Ao. Olier-ar-Mogn, doujet evit e ouiziegezh war ar yezh, o vevañ e korn-bro Roazhon, ar vro m'eo diwanet an emsav spontus-se.

El lec'hioù a zo dindan beli an dTalibaned e vez lakaet lezennoù nevez da dalvezout : ar baotred ar rank mirout ar barv, evel gwir emsaverien, an neb a rafe fazioù kemmadur a vo skourjezet , an toullbac'h evit ar re a skrivfe e falc'huneg. Ar Prezidant kozh Frañs Boudig a oa bet krouget war blasenn ti-kêr Roazhon, e deroù an dispac'h.

Hervez hor c'helaouennerien war an dachenn, e chomfe un nebeud Resistanted e kostez Bro-Wened (an « dTcheched ») hag e Brest, renet gant ar jeneraled Le Berr ha Le Du.

E-BARZH EVIT NETRA !

KEMENADENN AR « V.O.L.K. »

Resevet hon eus ur gemenadenn digant ar strollad politikel VOLK (« Vétérans pour l'Ordre et la Liberté en Komouaille »), evit klemm a-enep an dilabour e Breizh. Kinnig a ra ar strollad skarzhañ ar C'hallaoued er-maez, ha degemer ar Vretoned o labourat e Pariz. « Kalz gwelloc'h e vefe ar vuhez goude-se » a skriv ar VOLK.

BREIZH C'HOAZH

UDB-Emgann : daou emsaver lazhet

Karaez - Ne ouzer ket c'hoazh penaos eo bet kroget an tabut, e-barzh an davarn « Korn ar park », etre un nebeut izili eus an UDB ha paotred Emgann, deut da evañ ur banne diwezhañ ha kanañ « Kan-bale an A.R.B » e-tal ar c'hontouer, evel boaz.

Gouez da izili ar strollad emrener o dije kunujennet paotred Emgann sekretour meur an UDB, en ur huchal « Guyonvarc'h, fouzh da vamm ! ». Pezh a vez nac'het gante eveljust. Warlerc'h ar c'hrogad ez eus bet kavet daou zen (1 UDB - 1 Emgann) war al leurenn. Re ziwhezat e oa ...

Spi o deus kadoriaded ar strolladoù ne viro ket an degouezh-mañ ouzh sevel rolloù unvan evit mouezhiadeg 1998.

- 0 Bramm gadjet : ur stevell !
- 1 Me, Anna M., 20 vloaz, studierez, ...
- 2 B.T. : Brammruz ha Loufig
- 3 Ur rannyezh nevez : ar Bannleveg
- 4 Fatwa ar miz ha c'hoarioù all ...
- 5 « Independance Day » : ar film !

LIZHIRI AL LENNERIEN

Bep miz e lennan "Brammañ" gant kement a blijadur, met feuket on bet koulskoude get un dra skrivet e-barzh niverenn kent ar gelaouenn. Ken pouezhus eo e tlean tapout krog em fluenn, rak n'eo ket gant seurt traoù e vo gwellaet stad ar brezhoneg, na dazont Pobl Vreizh.

War ar bajenn 4 e lennan un tamm bruderezh evit ur benveg-tredan implijet get ar merc'hed hag an heñvelreviadet, hag a echu gant ar frazennig-mañ : " Priz 199 lur - Franco ". Ur vi koukou emichañs ? Ret eo deoc'h gouzout piv e oa ar Jeneral Franco, ur faskour eus ar vilañ, en deus tapet ar galloud e Bro-Spagn goude ur brezel euzhus ! Boureviet en deus kantadoù a dud, en o zouez Euskariz, a zo hor mignoned, hag a zo niverus a-walc'h e Breizh ! Hiriv, ar strollad FN a soñj mont war roudoù ar Jeneral Franco : ne c'hellomp ket gouzañv seurt emzalc'h, dreist-holl er c'helaouennoù brezhonek.

Spi em eus e vo cheñchet doare-gober "Brammañ" buan, rak ne fell ket din paouez da stourm a-enep Franco, an FN hag ar faskourien all, a glask gober o reuz e Breizh.

K.a.D.

KEMENADENN

Un nebeut harzoù-debriñ a zo aozet gant Strollad Mignoned ar Repuidi e Breizh e-doug ar goañv :

1añ-12-96 / 15-12-96 : Pondi (Ti-Kêr)
 7-12-96 / 15-12-96 : Kemper (Iliz-Veur)
 26-12-96 / 10-01-97 : Sant-Nazer (Isprefedi)
 10-01-97 / 18-01-97 : Karaez (Ti-Kêr)
 15-01-97 / 24-01-97 : Gwengamp (Iliz)

Deuit niverus !

STAJ BREZHONEG
 Bourrapl ha marc'hadmat !
 gant Anna Ar BEG
 Pgz : 02 35 29 44 56

Mignoned ker,

Plijet on bet o welout ur gazetenn nevez e brezhoneg o tont er-maez, met siwazh, ne c'hellan ket kas gourc'hemenoù deoc'h. Ur benveg-stourm e dlefe "Brammañ" bezañ, evit servij da zieubidigezh yezhel hor pobl Vreizh. Ar c'hontrol rik eo koulskoude ... Petra a gavan e-barzh an niverenn-kentañ ? Poltredoù, c'hoarioù nul, bruderezh evit bitrakoù, hag ur pennad e galleg ! Mezhus ! Ha kement a fazioù evit ken nebeut a bennadoù e brezhoneg ! Nann, arabat deoc'h soñjal dont er-maez bep sizhun, ne vefe ket un araokadenn ...

M.K.

Da skipailh "Brammañ"

Gourc'hemenoù deoc'h : bep miz eo gwelloc'h "Brammañ". Implijout a ran alies un niverenn bennak evit ar c'hentelioù skiant naturel a ran er skolaj. Chañs vat deoc'h.

T. D.

36 15
 FOUZH

*Deskiñ a ran brezhoneg
 gant Skol an Emsav !
 Ha c'hwi ?*



Ur gavadenn frouezhus evit dazont hor yezh : ar Bannleveg

Cheñchamantoù sebezus a vo a-benn nebeut e-barzh ar geriadurioù hag al levrioù yezhadur. Sell hon yezhourien ouzh framm istorel ar brezhoneg a vo trubuilhet penn da benn... Abalamour da betra ? Abalamour d'ur gavadenn bet graet gant kelennerien war ar brezhoneg e Bro-Naoned. Evit bezañ resisoc'h, ur rannyezh all a zo o paouez bezañ diskoachet. Ouzhpenn ar Gwenedeg, an Tregerieg, al Leoneg, ar C'herneveg, ret 'vo ober bremañ gant ar Bannleveg !

Warlerc'h bezañ kaset da-benn enklaskoù hir, met dedennus-kaer koulskoude, an Ao. Laurent ar Mogn a zo gouest da ginnig en un doare foran prouenn e zizoloadenn. A-du eo bet evit reiñ deomp (ha deomp-ni nemetken) e zielloù evit ma vefe lennerien "Brammañ" ar re gentañ kelaouet diwar-benn an afer-se.

Orin ar Bannleveg

Kavet e vez roudoù eus ar rannyezh-se war veur a barrezioù : Sant-Ervlan, Reudied, Saotron, hag e-barzh kartieroù kornog Naoned "Bellevue" ha "an Dervallières"

War ar seblant, ar vannlevegerien gentañ a zo bet klevet er c'harterioù-mañ tro-dro 1986. Komzet e c'hellfe bezañ bet araok (e 1984 ?), met e gwirionez den ebet ne oar en un doare resis. Hogen, kavet eo bet ur "graffiti" (arz pe treset war ar mogerioù gant tud ar bannlev), pe un "tag" kentoc'h e Bannleveg mat, e Bellevue just awalc'h, a c'hellfe bezañ koshoc'h c'hoazh. Skrivet e oa bet "A.R.B. FUCK DA POLIS", da lavarout eo e brezhoneg reizh : "Ne c'hell ket an archerien tapout paotred al Lu Dispac'hel Breizh". Dav e vo gortoz disoc'hoù an dielfennoù diwezhañ a-benn bezañ sur avat.

Ar Vannlevegerien : piv int ?

Ret eo bet d'hon enklaskerien furchal e-pad pell evit kompren deus pelec'h e teue ar vannlevegerien. Un disrann a vefe bet, sañset, e skipailh Diwan Bro-Naoned un tammig a-raok 1985. Tud 'zo ne felle ket dezho lec'hiañ ar skol e-kreiz kêr Naoned, hag a zo aloubet gant ar vourc'hizien hervezo. Neuze, un nebeut dioute (ur familh pe ziv, pas muioc'h), a zo aet d'en em staliañ e kornog ar gêr. Ha tamm ha tamm int deuet a-benn da drevadenniñ al lec'hioù-se, bet dilezet abaoe pell gant stourmerien ar yezh. Gellout a reomp lavarout eo bet graet ul labour brav gante, a c'hellfe bezañ keñveriet gant hini ar visionerien e-doug ar c'hantved tremenet.

Un dazont evit ar bannleveg ?

Gortozomp un tammig evit gwelet penaos e vo degemeret ar gavadenn ken souezhus, rak jeu a vo sur, etre pennoù-bras ar Brezhoneg, evit gouzout penaos skrivañ an trefoedaj-se, hag eo Brezhoneg gwir pe get, hag all ...

Un dra a zo sur memestra, an dizoloadenn-se a blijo d'ar re a zo aet fae gant istor ar brezel etre brezhonegerien desket-tre (tendañs Roro/Al Liamm) ha partizaned ar "Brezhoneg mamm-gozh" !

Geriadur bihan ar bannleveg

Bannleveg	Brezhoneg	Bannleveg	Brezhoneg
Teuchi	Chokolad	Tag	Tresadenn
Ziva ! / Zarma !	Opala !	Karefour	Gourmarc'had
RMI	Argant	Keuf/Lispo	Archerien
Ar c'hedme	Ar merc'hed	An tredpo	Ar baotred
Abadenn sonerezh Rap	Fest Noz	Nike	Botoù-koad
Ober ar choging	Redek	Ar zonzon	An toullbac'h
Sun da dad !	N'on ket a-du ganit !		
Arabat dekonñ	Arabat mont re bell ganti		

PAOTRED AR C'HRO

Goude bezañ klevet komz deus krouidigezh ar strollad "Merc'hed ar Vro", ur bochad paotred (en o zouez izili Emgann ha deus an UDB) o deus bet c'hoant ersaviñ a-enep an dra-se. Herveze ar merc'hed n'o defe ket da gemer perzh e buhez politikel foran Breizh. Miligañ a reont, en o c'hemenadenn gentañ, ar soñjoù gwregelour deuet, herveze bepred, eus ar broioù estren. Evite, ledan a-walc'h eo tachenn ar merc'hed e Breizh, ha n'eus ket da vrasaat anezhi. "Bremañ e vez gwelet merc'hed e pep lec'h : er festoù-noz, e-barzh ar manifestadegoù, en tavarnioù (gwashoc'h gwashañ !), ha lonkañ a reont evel paotred. Un nebeut dioute a zo bet degemeret evit bezañ sekretourezed e kevredigezhioù 'zo en Emsav (gopret uhel a-walc'h ouzhpenn); arabat klemm !"

Pe c'hoazh : "Ur strollad merc'hed e Breizh ha perak pas ur strollad heñvelreviadet a gemerfe perzh er stourm evit dieubidigezh broadel ha sokial Pobl Vreizh ?"

Evit echuiñ, "Paotred a C'hro" a c'halv an emsaverien da zifenn groñs d'o gwreg emezelañ d'ar machin-se.

BEZIT KENGRED GANT NTM 93

(Fouzh Da Vamm 'ba' r senseñdeuni)

Setu ar pezh a vez gourc'hennet d'ober gant ar strollad SDD 44, ur strollad rap brudet-tre (deus Bro-Naoned eveljust !) warlerc'h kondaonidigezh NTM 93 (eus bannlev Pariz), evit bezañ dispriziet ar flied gall en ur ganaouenn. SSD Posse (SDD evit Sun Da Dad) en deus galvet an holl gwir rapourien e Breizh da voikotiñ kanerien c'hall betek ma vefe didamallet NTM. Ur gwir rapour a rank, herveze, bout a-enep kreñv ar polis.

Diskleriet o deus "Polis gall pe polis Breizh : memes kaoc'h, memes disoc'h ! Polis e pep lec'h, justis e neblec'h !"

SKOUP !

Marianig ar Faouet he defe diskleriet a-raok mervel : Petra eo an torfed brasañ ? Sevel un ti-bank, pe laerañ anezhañ ?"

GOUEL

BREIZH ETREBORDER

D'ar 17 a viz Kerzu 1996

Sal ar festoù-noz e Bene (56)

2 eur : tavarn digor d'an holl

6e15 : prezegennoù + kig-sal + fritez

6e30 : digor-galon

★ ★ ★

8e30 : ABADENN-SONEREZH

Gant :

Triangle an Naoned (Rock Gae)

Meskal (Punk Hard-Kaoc'h)

REV (Rock divyezhek)

11e30 : FEST-NOZ PARTY

Gant :

Denez Brigand (kaner leounad)

Kan ha diskan :

Trouz ar Moc'h, Pim-Pam-Poum, If Lambig, Kanerien Bidon, Breuder Goasdoue, Fri-Furch Toutain-Bourdel, Pohers' Bros., Lak & Barzh, Pich & Poch, Jouin & Marijan, ...

3e30 : Kan-bale an ARB ha banne diwezhañ

4e : Pik echu.

Priz : 50 lur gall brein

Aozet gant : "Breizh etrebordel"
Roet e vo an arc'hant rastellet da Indianed an Alaska, mac'homet kriz gant an Amerikaned nul.

KENTEL X

Gant Mère Denez

Diviz

An Aotrou Kere	Mona, Mona, pelec'h emañ ?
Mona	Amañ Aotrou Kere, e-barzh ma c'hambrig !
An Aotrou Kere	Ha demat Mona !
Mona	Demat Aotrou Kere !
An Aotrou Kere	Petra a rez Mona ? Da-unan out ?
Mona	Ya, Aotrou Kere. Lenn a ran ul levr. Plijus eo.
An Aotrou Kere	O lenn ul levr emañ, Mona ? Mat tre eo ? Petra eo anv al levr ?
Mona :	"E toull Maria ? Jamez !" eo anv al levr, skrivet eo gant Youenn Terzhienn. Un istor trist eo. Met ne gomprenan ket an dro-lavar "dibluskañ ar c'hig".
An Aotrou Kere	Sell Mona. Petra eo ?
Mona	Ur pich eo.
An Aotrou Kere	Ya, Mona. Pe liv eo ar pich ?
Mona	Ruz eo, Aotrou Kere. Brasoc'h eo eget hini Yannig.
An Aotrou Kere	Berr eo ?
Mona	Nann, n'eo ket. Hir eo.
An Aotrou Kere	Anat eo, Mona. Bremañ poent eo lakaat ar pich e-barzh da ...Ya, mat tre, Mona.
Mona	-----
An Aotrou Kere	Kompren a rez "dibluskañ ar c'hig" bremañ, Mona ?

Mona

Ya, trugarez deoc'h, Aotrou Kere. Un den hegarat oc'h. Aes eo deskiñ brezhoneg.

An Aotrou Kere

Kenavo, Mona !

Goulennoù

Pe liv eo lost an Aotrou Kere ?
Piv eo an Aotrou Kere ?
Pelec'h emañ Yannig ?

Petra a zo gant Yannig ?
Ha plijus eo istor Mona ?
Petra a rez fenozh ?

Yezhadur

Anv gwan [Bras] ---> Brasoc'h

Gerioù all : don --->donoc'h plijus -->plijusoc'h fonnus-->fonnusoc'h

An anv-gwan-perc'hennañ :

Ma, da, e, he, ... Skouerennoù : Ma lost, da revr, he zoullig, e zorn

An doare-gourc'hemenn : Lak'! Kae! Sell! Deus!

Ur verb amreizh : c'hoari

Ur verb reizh : fouzhañ

C'hoari a ran ma-unan
C'hoari a rez ganin ?
C'hoari a ra ganti

Fouzhañ a ran
Fouzhañ a rez
Fouzhañ a ra

C'hoari a reomp asambles
C'hoari a rit alies
C'hoari e reont ivez

Fouzhañ a reomp
Fouzhañ a rit
Fouzhañ a reont

C'hoari a reer fenozh ?

Fouzhañ a reer

Poelladennoù

- 1 Un istor fentus a zo c'hoarvezet dit ivez. Displeg d'ar c'helenner.
- 2 Klask gerioù pe troioù-lavar heñvelster ouzh "dibluskañ ar c'hig".
- 3 Yannig, a oa kuzhet, en deus klevet pep tra. Ijin fin an istor.

*Tennet eus "Ar reizh buan hag aes" gant Mère Denez.
Omnivuoc'h embanner - Suce / Erdr 1996 - Pep tra miret strizh.*

ME, ANNA M., 20 VLOAZ,
STUDIEREZ, ...

A-bouez eo mont e darempred gant ar re yaouank, rak etre o daouarn emañ dazont ar brezhoneg, ha strivet hon eus kement pa oamp yaouank e rankomp diskuizhañ bremañ. Goulennataet en deus rener-meur "Brammañ" un emsaverz yaouank, a gav gwelloc'h mirout kuzh hec'h anv koulskoude.

Brammañ : Mont 'ra an traoù ganit, Anna ?

Anna M. : Ya, mat tre.

Brammañ : Komz a rez brezhoneg ?

Anna M. : Ya, un tammig.

Brammañ : Plijus eo deskiñ brezhoneg ?

Anna M. : Ya, plijus tre.

Brammañ : Deus pelec'h ez out genidig ?

Anna M. : Me a zo ganet er C'hreiz Breizh, e-kichen Spezed.

Brammañ : Da dud a oa deus ar vro ivez ?

Anna M. : Nann, ma mamm a zo bet ganet e Bro-Vigoudenn, ma zad e Gwened.

Brammañ : Ha da dud kozh ? da eontr ?

Anna M. : N'em eus ket soñj ...

Brammañ : Gant piv ac'h eus desket brezhoneg ?

Anna M. : Heuliet 'm eus kentelioù Nikolai Davanoukian, e Roazhon. Ur staj em eus graet e Skaer gant Dudu ha paotr-Karnag.

Brammañ : Da soñj a-zivout dazont ar brezhoneg ?

Anna M. : Gwechall eo oa gwelloc'h : an holl dud war ar maez a ouie brezhoneg. Dreist e oa. Ar re yaouank ne reont foutre kaer eus ar brezhoneg. Ur vevh ruz eo !

Brammañ : Araokadennoù a zo memestra ?

Anna M. : Eürasamant ez eus emsaverien galonek war an dachenn, evit stourm diehan ! Ur pannell divyezhek a zo bet lakaet er vourc'h emañ o chom enni.

Brammañ : Oh, dont a ra brav hor yezh ganit !

Anna M. : Trugarez Aotrou Brammañ.

Brammañ : Ha te, petra 'rez evit hor yezh ?

Anna M. : Gant mignoned em eus savet ur gevredigezh sevenadurel. Goulennet hon eus ur yalc'had digant Kuzul-Jeneral Penn

ar Bed evit moulañ ur skritell divyezhek, hag aozañ ur fest noz.

Brammañ : Meñnoziou mat, Anna. Trugarez ha chañs vat dit !

Bezomp dinec'h : n'eo ket marv ar brezhoneg c'hoazh ! Youpi !

Pennad-kaoz graet gant skoazell **Skol-Uhel ar Vro** ha **Kuzul-Rannvro Breizh**.

NEVEZ DEUET ER-MAEZ !**SEVEL A RAN ...
UR STROLLAD POLITIKEL !**

Ur c'hoari hengounel e Breizh, evit kaout plijadur ha koll kalz arc'hant gant mignoned !

Pep tra a vez displeget brav :

- penaos tutañ emsaverien gozh.
- penaos sevel ur gelaouenn.
- penaos feurmiñ ur ranndi.
- penaos skrivañ un trakt.
- hag all ...

Ur c'hoari a blijjo d'ar re vras koulz ha d'ar re vihan e-pad nozvezhioù hir ar goañv ! Hastit afo neuze !

Priz : 50 000 lur. OBD embanner.

DA ZONT ER-MAEZ DIZALE :**SEVEL A RAN ...
UR RADIO !**

Rakprenit diouzhtu ar c'hoari nevez !

Pennad-kaoz gant Guillaume M. implijad e skol Diwan Naoned

Brammañ: Neuze Guillaume, mat an traoù er skol ?

GM: O ya ! Soñjit 'ta, abaoe m'on CES, dre ma ne c'hounezan nemet 2500L bep miz, m'eus gwir da gas restachoù boued ar verenn d'ar gêr.

B: Ha n'eo ket re ziaes gant ar vugale? Deuet oc'h a-benn da vezañ degemeret gante?

G: O ya, mont a ra kalz gwelloc'h. Da gentañ eo bet start pa m'eus kroget, rak ar vugale a glask amprouiñ ar re nevez evit gouzout piv int. Teurel a raent traezh warnon alies hag e roent taolioù-troad din. Ur wech ur bugel CMI (unan bras kwa !) en doa kemeret ma botez evit he lakaat war an doenn goude bezañ staotet e-barzh. Met, diouzhtu warlerc'h on aet da gerc'hat anezhi, peogwir eo ret bezañ rust gant ar vugale a-wechoù.

B: Ha bremañ ?

G: E lenn a ran bep miz evit pinvidikaat ma brezhoneg.

B: Eveljust, met hiviziken, ma fell deoc'h, ha cheñchet o deus an traoù ?

G: Opala, penn da benn ! Netra da welet ! Bremañ omp mignoned. Ha pa skopont warnon e ouzon mat eo evit farsal.

B: Ya, anat eo. Hag a-hend-all, petra rit pa ne vezit ket oc'h evezhiañ anezhe war ar porzh ?

G: Servijout a ran dezhe ar verenn-vihan goude ar c'hentelioù.

B: Ha neuze ?

G: Mat-tre. Kudenn ebet. *Tevel a ra Guillaume ur pennadig hag e prederi.* (...) Gwir eo, alies-tre e taolont dour war an tammoù bara 'm bez aozet evito, pe ez eont da lakaat ar boued er privezioù goude bezañ diskaret ar pladennoù war al leur. Met war-lerc'h fin ar c'hlas eo ret d'ar vugale c'hoari, ha setu perak e lezan anezho farsal un tamm. C'hwi ' oar, n'eo ket drouk. Tamm ebet.

B: Eveljust, eveljust. Ha goude ' vez graet ar studi ?

G: Setu. Aze, n'eus ket da glemm. Zoken ma vez bemdez daou pe dri diouto pignet war an taolioù o tiskouez din o revr, tra ma vez ar re all o c'hoari mell-droad en ur huchal : "A poil

Guillaume". Me ' gav eo aesoc'h evito ober o labour-noz ma vez plijus an aergelc'h. Ha ret eo anzav eo fin an devezh. Skuizh int. Normal eo e vefent un tamm dirollet. N'int nemet bugale.

B: Ma, ho trugarekaat a reomp Guillaume. Gant tud eveldoc'h eo ez a war-raok ar skolioù Diwan hag hor yezh.

G: O, c'hwi ' oar, ne ran nemet ma labour, ar gwellañ ma c'hellan.

Nozvezh c'hlas e Breizh

Goude gwalldaol ar Gorsikiz e ti-kêr Bourdel, aozet gant an FLNC, ar Vretoned n'o doa ket c'hoant bezañ ankouaet. Ret e oa diskouez e vo bepred Breizhiz o stourm a-enep ar Stad-C'hall evit gwirioù hon pobl. evit ar vro, evit an dieubidigezh ha peogwir n'omp ket gall, gast !

Etre an 18 hag ar 19 a viz Du, an nozvezh-pad, e meur a lec'h e Breizh eo bet graet gwalldaolioù.

- E Pondi, gwerennoù un abribus zo bet torret.
- E Gwengamp, rodoù ur c'harr EDF-GDF zo bet toullet.
- E Kemper, ur boubelenn zo bet lakaet tan enni e-kichen ar prefeti.
- War vogerioù lez-varn Roazhon eo bet skrivet: "Levert en a un dans le cul" ha war re ar rektordi: "Gall = lost bihan"

Emañ ar boliserien o soñjal eo bet graet an taolioù gant an ARB. Boutailhoù gwin, boestoù-mir pastez Henaff hag ur c'hasedig Glenmor kavet war al lec'hioù a lak an enklaskerien da soñjal el lu breizhat.

Degemeromp ar Pab adarre !

Plijet eo bet ar Pab o weladenniñ Breizh. Degemerus en deus kavet ar bobl gant he zokoù fentus, he c'hrampouezh hag he yezh iskis.

Ken en deus divizet dont en-dro a-benn ur bloavezh. Eveljust, ur bern Breizhiz a fell dezho stourm evit mirout outañ da zont en dro.

Ur strollad nevez avat a zo o paouez bezañ krouet, evit ma vo degemeret an Tad Santel ma ra an oferenn gant un triskell bras a-ispilh ouzh e c'houzoug.

"Ur chañs bras eo gweladenn ar Pab evit ma vo anavezet erfin sevenadur Breizh" a lâr ar strollad nevez. "Ha goude e c'hellimp goulenn digant ar chadenn Frañs3 un abadenn 15 munutenn miziek evit kaout kentelioù gavotenn gant Veronik ha Davina"

A galon vat gant ar strollad-mañ ha trugarez en a-raok d'ar Pab evit en em wiskañ evel ar gwir Breizhiz.

Lonkit e brezhoneg

Jeu zo bet ar bloaz-mañ e-pad ar staj "Lonkit e brezhoneg" brudet-tre eus Skaer, etre ar virourien (al lodenn vrasañ eus an dud) hag ur strollad nevez, c'hoant gantañ cheñch kustumioù ha stumm staj an hañv.

Deuet e oa, eveljust, ur bern tud eus Breizh a-bezh met eus broioù all ivez, evit riboulat, goulloñ barikennadoù Korev, tapout tortadoù, dislonkañ, ha muioc'h c'hoazh ... ken ma vije graet pep tra E BREZHONEG. Bemnoz e-pad ar goan e veze servijet sistr ha gwin d'ar stajidi a gendalc'he war-lerc'h e tavarn kreiz Skaer, anvet "Central Bar", pe e-barzh hini ar staj gant banneoù Korev, pe Schtrumpfeifer evit tud eus Skrigneg. Tro dro 1 eur e kroge tost an holl da farsal ha da vezañ mezv e brezhoneg, pal kentañ aozerien **Kamp Etrekeltiek Ar Vezverien**. Met ar bloaz-mañ ...

Ar bloaz-mañ, ur strollad tud yaouank o deus klasket en em silañ e-barzh KEAV evit cheñch penn da benn spered ar staj, evit lakaat hon staj deomp-ni da vezañ *yaouankoc'h* (evel ma lâront !), gant o doareoù nevez.

Bez' o deus klasket lakaat kentelioù brezhoneg bep beure, pe kentoc'h e-kreiz an nozvezh peogwir e felle dezhe kregiñ adalek 9e diouzh ar mintin! Biskoazh kemend-all!

Meur a wech eo bet gwelet ur vaouez, ur c'hloc'h ganti, o klask dihuniñ ar stajidi aketusañ ha kalonekañ, o doa labouret gant o fintadoù Korev betek diwezhat-tre en nozvezh a-raok.

N'eus ket da dortal : ne c'heller ket o lezel kendalc'her gant o zroioù-kamm. N'hon eus ket c'hoant e vefe cheñchet hon staj gant istrogelled deuet eus den a oar pelec'h. Rener KEAV hag e genlabourerien a glask penn da gement tra a c'hello mirout ouzh ar re-se da lazhañ hon staj santel.

Biskoazh kemend all

E pep lec'h e Breizh ez eus roudoù eus sekteñ Templ an Heol.

Sur eo bremañ enklaskerien b/Paris eus ar pezh a sonjent. Bez' eus prouennoù ha tout!

Hag ar sekteñ-mañ, lazhet ganti ur bern tud c'hoazh er Verkor (Bro-C'hall), a zo hervez ar Polis kreñv-tre e Breizh a-bezh: ur strollad e tost pep kêr 8 000 annezad, emvodoù bep sizhun gant pemzek den da nebeutañ evit al lod brasañ.

Ar pep gwashañ evit an enklaskerien eo e vefe gwelet dreist-holl tud yaouank e-barzh an emvodoù hag e vefe muioc'h-mui a izilli abaoe un nebeut bloavezhioù.

Bep gwech e vez graet memes mod an emvodoù : lakaet ' vez sonerezh gant an ambrouger (ar c'helenner evel ma vez graet anezhañ ganto) ha diouzhtu war-lerc'h e c'hell kregiñ an oferenn zu ...

Ur c'hloc'h a vez graet gant an izilli, an eil staget ouzh egile dorn ha dorn (pe ar biz bihan a-wechoù !!), ha lakaet' vez ar c'hloc'h da dreiñ, pep hini o fiñval e dreid hag e zaouarn en hevelep doare eget e amezeg. Evel ma vefe an dud o tañsal.

Ar c'hloc'h an hini eo eveljust en deus lakaet ar boliserien war an hent: an holl o deus soñj eus ar strollad tud kavet marv en o gourvez en ur stumm kelc'h, lazhet dre an tan gant sekteñ Templ an Heol

War a seblant e vefe rannet pep oferenn zu e mareoù disheñvel bep a anv iskis ganto: gavotenn, hanter dro, fiseleñ hag all. Ingal ez en em gav an holl strolladoù lec'hel en ul lec'h resis ma vez kavet eno ... ar Gourou.

Ur c'hloc'h bras meurbet a vez graet gant an holl, hag ar Gourou eo a gan tra ma vez an holl izilli o tañsal. O kalsk bezañ e trañs. Un nebeut amzer war-lerc'h eo kroget

an trañs da vat : c'hweziñ a reont ha diwezhat-tre ez echuo an oferenn zu ...

"Fest Noz" a vez anvet ar bodadegoù-se ha du-se e vez kavet ur bern tud o komz ur yezh kodet, evel ma vije ur yezh all eget ar galleg e Stad C'hall. Tost pep tra a oar bremañ an enklaskerien hag ur bern prouennoù zo bet dastumet ganto.

Chomomp war evezh avat ! Ma ho peus gwelet pe klevet komz eus strolladoù evel-se en ho kêr, ma ho peus merzet doareoù iskis gant hoc'h amezeg, n'eus ket da dortal : skrivit dimp a-benn hon kelaouiñ pe pellgomzit d'an niverenn-mañ :

01 45 27 03 78

Gouel bloaziek an ARB

Gouel an ARB, Arzourien Riboulerien eus Brest a vo dalc'het d'ar 15 a viz Kerzu e sal-kêr. Kroget ' vo gant diskouezadeg al labour graet e-pad ar bloaz gant izilli ar gevredigezh. Pedet ' vo ar bloaz-mañ Euskariz hag a ginnigo deomp Arz o bro. Evel pep bloaz e echuo ar gouel gant ur bal gwisket. (s.o. luc'hskeudenn hini warlene e-kichen).

Klask a ra ar gevredigezh tud a-du evit reiñ bod d'un Euskarad pe zaou en o zi (evit fin an nozvezh).

Kinnig labour

Klask ' zo war ur skoazeller(ez) evit skol Diwan Roazhon. Labourat a raio er c'hlas etre 9e ha 4e30, bez e vo er gegin da greisteiz hag e skubo ar skol warlerc'h betek 7e. Goulennet ' vez gouzout brezhoneg, kaout skiant-prenet gant ar vugale ha labourat e-pad ar vakansoù. Ne vo ket paeet peogwir n'en deus ket kalz arc'hant Diwan ha peogwir eo ur chañs dija labourat evit ar vro.

Hastit buan da gas ho lizher-goulenn. Ne vo ket plas evit an holl.





Bevet Breizh dieub ha sokialour.


Setu evidout, paotr yaouank, ur poster da lakaat e-barzh da gampr
Bal gwisket gouel bloaziek an ARB warlene

TROIOÙ-KAER BRAMMRUZ

Ne oa ket aes buhez hon hendadoù gwechall...



GRRROIN!
GRRROIN!



WOUAF! WOUAF!



Dreist

Chañs em eus bet erfin!
An hoc'h-gouez-mañ
a vo fardet gant Naïg!



OLOLE!



Emañ Naïg oc'h ober penn-mouzh

Ha neuze,
Naïg?



Tav 'ta, inosant!



Petra a c'hoari ganit?
Aet on skuizh!
Ne baouezez
ket da chaseal.



N'em eus ket
c'hoant ober
ar vatezh
evidout
pelloc'h, setu!



N'out ket eürus ganin?
Petra a vank dit?



Prest on da
emezelañ da
"Merc'hed ar
Vro!"

Arabat mont re bell
ganti!

Gwelet 'vo!
Gouzout a
rez ar pezh
a c'hoarvezo
ma ne rez
netra ...



Ur pennadig goude-se

Komprenet en deus mat, ar wech-mañ !

Drouk out bet gant da vreur avat !

Loufig, sot eo ar c'hi !


Tamm ebet, Naïg ! Met c'hoant a zo gantañ mont da c'hoari ganit ! Eveldon

Ar peul koad-se a blij dit Naïg ? Gouzout a rez ...



E-unan emañ Brammruz, o vagañ sonjoù du ...

Ma ! Diaes eo kompren ar merc'hed a-wechoù



Opala ! Kavet 'm eus peadra da zebriñ e-pad ar sizhunvezh !

Chom aze !

Tost echu eo hol labour ! Brav e vo an deltenn ! Gwelloc'h eget e Spezed !


Skuizh on un tamm !

Eo ! Me 'zo vont da labourat 'ba' park ! Koa !

Al O c'hortoz ac'hanout e oamp

Me ivez ! Chom a rin dindan an deltenn

Te, Loufig, peus netra d'ober bremañ ?



Tost echu eo al labour




Ma vefen e Roazhon e vefen gant ma mignoned eus "Paotred ar C'hro" Hañ ! Hañ !




N'eo ket tout lar hañ ! hañ ! ...




Ale ! Bec'h dezhi ! Buan !



C'HOAZH ! C'HOAZH !



Diwezhatoc'h



Ha neuze, Loufig ?

Arabat ober goap ! N'eo ket plijus ho kevout o c'hoari, pa 'z on-me o poaniañ !

Dres, degaset em eus ur pikol gwaz evidout !



© Priso/Bilon

RADIO BREZHONEG
Bourrapl ha trouzus !
gant Herve Ar BEG

Pgz : 02 22 29 56 44

36 17
LENA

Bep miz
klaskit lenn
Combat du Centre
Bretagne
Fentus ha sokialour !



Katoliged : ar gwir da vezañ disheñvel

KENTELIOÙ BREZHONEG

Bourrapl hag aes !

gant Gwenola Ar BEG

Pgz : 02 44 35 29 56

Dibunadegoù katolik e kêrioù Breizh ! Yae ! Ha lorc'h enno !

E kêrioù Kastell-Paol evit an trede gwech, hag e Gwened evit an eil o deus dibunet katoliged ha katoligezed ar miz-mañ. Ur wirionez nebeut anavezet gant darn vrasañ ar Vretoned eo : nebeutoc'h nebeutañ a gatoliged a zo en hor bro, ha lorc'h enno e klaskont stourm evit gwirioù nevez. "Emañ Jezuz o tistreñ !" a c'helle bezañ lennet war ur banniel dalc'het gant tud yaouank, e Gwened. Ha dav eo anzav eo bourrus arvestiñ ur seurt engroez, tud kozh ha yaouank asambles, gwisket kran, entanet gant o feiz, o kregiñ gant ur ganaouenn meuleudius.

War aesaat ez afe buhez ar gatoliged e Breizh ? Kredapl, met na zisoñjomp ket an heskinerezh a vez lod an darn vrasañ diouto, avat. Dalc'hit soñj ivez eus donedigezh Yann-Baol II, penn-bras ar strollad, hag eus ar manifestadegoù a zobet aozet en e enep...

Ar gatoliged a c'houlenn hiviziken e vefe doujet ouzh o gwirioù : en em vodiñ en o iliz, bezañ dimezet hervez o c'hredennoù, lidañ un nebeut gouelioù* a-hed ar bloavezh.

...

A bep seurt tud a zo er gevredigezh : dav eo deomp degemer ar re n'o deus ket ar memes doare-bevañ egedomp ivez !

J.M. Renard

* Daoust hag e ouezit, da skouer, eo katolik a orin gouel Nedeleg ?

Emvod Kuzul-Rannvro ar "Pays de Loire" : votet eo bet ar budjet nevez.



PEUPLE FRANCAOUI

La cueillette des champignons

par Philippe-André Sarthe

XXXVIII ème chapitre

Mon grand-père avait pris l'habitude, chaque année, d'aller dans la forêt, aux pieds des montagnes, près de Trou-du-Loup. C'était devenue une tradition, quoi !

- C'est comme ça ! me disait il, de sa voix douce, chaude et malicieuse.

Je le suivai, portant le panier familialh. Autrefois, tous les habitants du bourg où nous vivions dedans avaient un contact direct avec la nature.

Mon grand-père, originaire de Monts des Bites, en profitait pour me conter les istoires de sa jeunesse, la sagesse des vieux, et chantait des chants anciens.

Aujourd'hui, le petit bois a été rasé : un lotissement a été construit, près d'un parking*. La vie a quitté cet espace de rêves...

A suivre

* Parking : espace pour garer les voitures.

36 17
POK

36 15
SUN



UDB - Emgann : adkroget eo an divizoù.

Tro-lavar hengounel :

"Ar PS hag an UDB a zo

evel breur ha c'hoar e Breizh"

36 15
LIP

FATWA AR MIZ

- Ur fatwa a zo bet embannet evit kondaoniñ didruez Patrig an Habask, rener ar gelaouenn Al Lanv, n'en deus ket embannet UR bajenn diwar stourm an Euskariz e niverenn zivezhañ e gelaouenn.
- Al lennerien a nac'ho adkoumanantiñ da Al Lanv a yelo da dTir-nanOg diouzhtu !



LAURENCE LE VERT,
MA REVR !



SKAÑDAL !

Emvod-meur ar strollad "Emgann" : ar vugale ivez !

Unvaniezh Demokratel Breizh

(U.D.B.)

BP 215

44 007 Nantes Cedex



KEMENADENN

Ur strollad demokratel, eus an tu-kleiz ha kevredadel eo an Unvaniezh Demokratel Breizh (UDB). Emañ o klask sevel ur gevredigezh nevez gant darem-predoù disheñvel etre an dud, un doujañs ouzh sevenadur hor bro, he yezh, ...

Kement-se a vo tizhet dre ar mouezhiadegoù, en ur labourat gant strolladoù a-gleiz all, ha n'eo ket gant ar feulster, forzh peseurt hini e vefe.

Kondaoniñ a reomp rik neuze an darzhadenn a zo c'hoarvezet e _____
d' a _____ a viz _____ 199 , a-enep _____.

Trugarez evit embann ar gemenadenn-mañ e-barzh "Le Telegramme"
"Ouest France"
"Presse Océan"

Gwellañ sonjoù

Evit an U.D.B., ar sekretour-meur


K. Guyonvarc'h



MISS FRANCE

— Parâ, merc'h ? Te garje bean Miss France ? D'az oad me mije karet gwelloc'h bean ar Werc'hez. Vari.

Tennet eus "An Oaled" - 1933
Cheñchet an traoù abaoe,
neketa ?



Díwallit !
Ur gazetenn leun
a lubrisite hag a friponaj
eo "Brammañ" !





BERV EO AR BREZHONEG !

*"Un alc'hiwez en deus roet Doue d'an dud
evit mont tre er Baradoz. Na zisoñjit ket
he ziverglañ bep an amzer !"*

Yann Baol II
Pubis in terram

Chanter "Breizh Santel" e Sant-Tupedu - 1995.





Da biv eo ar c'hlopenn-mañ ?

- A Alain Juppé
- B Per-Jakez Helias
- C Yann-Fañch Kemener
- D Unan all


C'HOARIOMP UN TAMM GANT TONTON JAKEZ !

Divinadenn


Peseurt diforc'h a zo etre Charles Pasqua hag ur sac'h kaoc'h ?

Respont : ar sac'h

An emsaverien-mañ o deus kollet o hent, pa glaskent mont da emvod-meur o strollad. Sikour anezho !



A



B



K



1



2




3



GWELTAZ AR FUR A GINNIG DEOCH

Ur goudor
hepken
presbital Landelo !



INDEPENDENCE DAY
PULLANDRE : AN DISTRO !

Canl : Y. Puillandre Jañ Mañ Salomon Scrj Faucheur
Denez Riau Nai'g Cars J.Y. Cozan Special Guest : A. Coraud
Sonerezh : Dan ar Bras Danvez : M. C'hadhafi Tres : Nono

Canl sikour Skol Ulhel ar Vro ha Kuzul Penn ar Bed



Kazetennoù an Emsav ...




BRAMMAÑ !

EVIT NETRA !

100%
FOUZH
DA DAD!

TUD YAOUANK
DIWALLIT !



GRAET E NAONED

Kennet ho peus niverenn gentañ ur gelaouenn nevez :

BRAMMAÑ

Ur gazetenn leun a lubrisite hag a zisoujañs, e brezhoneg !

Hor chomlec'h : Brammañ 49 kae ar Foz 44 000 Naoned

Hor rener : J. Strogell

Hor albokad : Yann Kouch